

**Gant va askel diwar e dal**  
**Me skub neuze peb poan spered,**  
**Hag e galoun, bete'r weled,**  
**Ouz-in dioc'h-tu a rank tridall.**

**Me n'am beuz morse naoun e-bed,**  
**Enn e zourn me a zebr bara,**  
**Hag enn e werenn da eva**  
**E kavann dour, p'am beuz sec'hed.**

**Pa vez debret gan-en va fred,**  
**Me a c'hournij enn-dro d'e benn ;**  
**Ha gant va diouaskellik wenn**  
**Me a c'holo va barz karet.**

**Pa gousk, me niж war e delenn**  
**Hag hi ha me, gant karantez,**  
**A gan d'ezhan toniou nevez**  
**Ken a skuizomp war e varlenn.**

**Setu eno, laouenanik,**  
**Evit petra ounn digaset ;**  
**Ober vad da veza karet**  
**A zo noz-deiz labour koulmik.**

**Euruz ar Barz en deuz kavet**  
**Eur vignounez evel hou-ma !**  
**Da gement barz a zo o ouela,**  
**Aotrou Doue, eur goulm digaset !**

## Soudard Kastel-Paol

### I

**E Breiz-Izel me zo bet ganet**  
**Kastel-Paol eo va c'henta bro**  
**Ar vro wella eo a ve kavet,**  
**Va zour ar c'haera tro-war-dro ;**  
**Dre-ze ho c'harenn**  
**Ha p'ho gwelen**  
**Bemdez c'houlou Doue e lavarenn**  
**Me gar va c'bleuz alaouret**  
**Va zour dantelezet**

bis

### II

**Pa glevjounn voa red mont d'ar brezell**  
**Dilezel va muia-karet**  
**Va zad, va mamm, va bro Breiz-Izel**  
**Bale ha heul ar sourdardet,**

— 24 —

**E** lavarjounn krenn :

Ne d'inn biken,

Ne d'ann ket, ne d'ann ket, ne d'inn biken :

Gwell eo va c'hleuz alaouret

Va zour dantelezet.

### III

Ha pa vije bet eat drouk enn oun,

Red voe senti, mont euz ar gear ;

Hag int o welet va rann-galoun,

Ann dud fall rea ar skouarn vouzar,

A lavare d'in

En eur c'hoarzin :

Yvonik, ha te glev ann daboulin ?

Dilez da gleuz alaouret

Da dour dantelezet.

### IV

Kaset da soudard a enep d'in,

Bemdez a-zindan ann armou,

Gant ho gallek me droe va c'hein

Pa lavarent : « a-gleiz, a-zeou ! »

Ha dre ma troenn

Vel ma c'hellenn

ENN eur zellet tro-war-dro e klaskenn :

Gwelet va c'hleuz alaouret

Va zour dantelezet,

### V

Ann dinell d'in ne rea vad e-ebed.

Treutoc'h-treuta teuen bemdez ;

ENN hent war lerc'h choumenn mantrret,

E pep korn tro, evel eur spes ;

## — 25 —

Eno e ouelenn  
 E lavarenn :  
 Piou en divije kredet e varvjenn :  
 Pel dioc'h va c'bleuz alaouret,  
 Va zour dantelezet ?

## VI

D'ar paotr-ma n'euz netra da ober,  
 Nemet her c'has dioc'h tu d'he vro ;  
 D'ar vered 'z ai ma ne da d'ar ger,  
 Me 'r medesin, rak great he dro.

Hen e lavare  
 Pa glevann-me :  
 — « Del da zach', mignoun, ke skanv da vale :  
 « Warzu da gleuz alaouret  
 « Da dour dantelezet. »

## VII

Kenavo, soudarded ar brezell !  
 Fuzuill, taboulin. kenavo !  
 Me voe hep dale e Breiz-Izel,  
 Ha kaera deiz, deiz ann distro !

Oh ! me a c'hoarze  
 Hag a gane,  
 A dride, a ouele hac a lamme :  
 O welet va bro garet                   bis  
 Va zour dantelezet

*(Troet diwar eur zon gallek, grêl a gav d'in gant eun itron a Germoysan  
 wardro 1830. An ton, ken anavezet, n'eo ket breizad, mes flamank, war  
 henvel).*